



D'an holl skolaerien skolioù ha klasoù divyezhek Breizh

Titouroù :



FEA (Fanny CHAUFFIN) : afea@laposte.net - 02 98 71 74 94 - 06 79 14 96 87

KEIT VIMP BEV (Angelina BEAUVIR) : angelina.kvb@orange.fr - 02 98 26 87 12

Demat,

Goude 7 bloavezh Priz ar Youankiz er skoloù hag el liseoù (62 levr a zo bet embannet ha 45 evit ar re vrasañ) omp laouen o welout ar berzh a ra er skolioù ivez PRIZ AR VUGALE. Er bloaz-mañ e vo aozet ar genstrivadeg gant FEA ha Keit Vimp Bev, evit ar pedervet gwech . 42 skol o doa kemeret perzh ar bloaz paseet, deus Paris, Naoned, kalzig deus bro Leon (Gwitalmeze, Gwiseni, Brest, Plougastell, Plabennec, Kleder, Lesneven ...), 3 skol e bro Gerne (Tregon, Banaleg, Kemperle) hag 11 e bro Wened. Skolioù zo a zo boas da labourat gant ar priz, kemer a reont perzh er juri ha prizius eo o evezhiadennoù : Kommanna, Tregon, Lannuon, Montroulez, Pempoull, Teiz. Trugarez d'an holl evit ar c'henlabour, a-drugarez deoc'h e vez kendalc'het gant ar raktres-se.

Pevar levrig a vo kinniget e-kerzh ar bloavezh 2010/2011 : istor Tangi, ur paotr a oar komz gant ar merien (un tammig hiroc'h eo al levr-mañ eget ar re all), hini ur plac'hig o kuitaat ti he zad e-kreiz an noz, istor kevrinus ur bugel klañv, hag ur gudenn mignoniezh etre div blac'h. Sed aze danvez Priz ar Vugale 2011.



Mat 'vefe deomp gouzout pet dastumad 4 levr a blijfe deoc'h kaout, evidomp da lakaat moulañ an niver a skouerrennoù rekis. Leugnit ha kasit ar follenn-respont (da-heul) buan da Geit Vimp Bev-22 Grand' Rue-29520 LAZ. **Un dastumad evit ar skolaer hag ur CD gant ar pevar istor lennet gant Sten Charbonneau a vo profet da gement skol hag a gemero perzh.**

Ur wech resevet al levrioù e miz Here e c'helloc'h lenn anezho er c'hlas, en doare ma plijo deoc'h. Gwelloc'h eo koulskoude dibab un trimiziad evit labourat warno (mod all e vo skuizh ar vugale gant al levrioù) ha kas deomp disoc'h votadegoù ar skolidi a-raok ar c'hentañ a viz Even. Ur follenn votiñ a vo kaset deoc'h e koulz.

Embannet e vo an disoc'hoù e kreiz miz Even. M'ho peus c'hoant e vefe graet se en ho skol, kelaouit ac'hanomp. Moaien 'vo deoc'h kejañ gant ar skrivagnerien ivez, evel e Kommanna pe e Tregon ar bloaz-mañ.

PRIZIOÙ :

5 euro an tamm

14 euro evit ar 4 levr (e-lec'h 20 euro) !

+ **ur rummad profet** evit pep skolaer a gemer perzh.

F. Chauffin

